


KELEIER 4 F AN NAONED



NIVERENN 11

GENVER 1977

Keleier an Naoned

kelaouenn viziek savet gant Naonediz hag embannet e kêr an Naoned abaoe miz Genver 1974
(liesskrivet betek dibenn 1975 ha moulet abaoe miz Genver 1976)

Niver a skouerennoù tennet eus an niverenn-mañ : 500
Ti-moulerezh : Copie 22 PEDERNEC (Bro-Dreger)
Burevioù : 79, Quai de la Fosse — 44000 NANTES
Merourez : an It. Gwenola ROSSINYOL, 11, rue de l'Ascension, 44700 ORVAULT
Kont-bank : Niverenn 58 190 1081 Banque Populaire Bretagne Atlantique (BPBA), Agence du Pont du
Cens, 40, route de Rennes, 44300 NANTES
Koumanant-bloaz : 50,00 F (dek niverenn)
Koumanant evit ar re a zo treut o yalc'h : 25,00 F
Kregiñ a ra ar c'houmanantoù e penn kentañ ar bloaz
Bloavezh 1976 klok (dek niverenn, 240 pajenn) : 25,00 F

Ur ger d'hol lennerien

Setu ur pevare bloavezh o kregiñ evit **KELEIER AN NAONED**. Soñj hoc'h eus moarvat eus an niverennoù kentañ deut er-maez e derou 1974 ha tennet hepken un 50 skouerenn bennak anezho... Tamm-ha-tamm ez eo tremenet niver hol lennerien en tu all da gant. Un taol-arnod hon eus graet warlene o tremen d'ar mouladur offset hag o tennañ 500 skouerenn eus pep niverenn. Abaoe ma vez moulet **KELEIER AN NAONED**, ha n'eo ket mui liesskrivet, e tenn muioc'h d'ur gelaouenn wirion ha tu a zo da lakaat enni skeudennoù ha tresadennoù, pezh a zo kalz plijusoc'h hep mar ebet. Brasaet eo bet ment ar gelaouenn adalek an niverenn-mañ evit tremen d'ar vent europat ha kemmet eo bet ivez doare al lizherennoù evit derc'hel kont eus evezhiadennoù al lennerien.

N'eo ket direbech **KELEIER AN NAONED** nag e keñver doare, nag e keñver yezh, nag e keñver danvez. N'eo ket graet gant tud a vicher, anat eo, gant tud a youl vat, ne lavaromp ket met ar youl vat n'eo ket a-walc'h evit kas da vat ul labour diaes nag evit adsevel ur vro. Setu perak ez eo ken talvoudus skoazell hag alioù tud all, ampartoc'h eget an nebeut Naonediz a glask reiñ lañs d'ur gelaouenn vrezhonek e kêr vrasañ Breizh. Laouen omp bepred da zegemer diganeoc'h lizhiri, zoken maz int taer a-wechoù, rak n'eus netra gwashoc'h eget an diseblanted. Laouen-tre omp ivez da zegemer diganeoc'h pennadoù, skeudennoù, tresadennoù...

E-keñver arc'hant, n'eo ket gwall skedus stad hor c'hef. Tu a vo da embann hor c'hontoù un deiz mar fell deoc'h. Daoust da vrokusted meur a goumananter, n'omp ket deuet a-benn da stankañ an toull e 1976 met peogwir e chom ganeomp rummadoù klok eus ar bloavezh 1976, hon eus spi da gempouezañ an traoù dre werzhañ anezho nebeut ha nebeut... Keroc'h e kousto moulañ **KELEIER AN NAONED** e 1977 en abeg da 1977. Ker-ruz eo moarvat evit an holl re a zo treut o yalc'h, tud yaouank war o studioù, tud dilabour, tud war o leve ha kalz re all. Arabat da zen ebet chom hep koumanantiñ en abeg d'ar priz-mañ. Ma ne c'hellit ket dispign glasker koumanantiñ da gement kelaouenn vrezhonek o tont er-maez e Breizh (met pegement e tispign pep gounit arc'hant. N'omp ket ur gelaouenn vras a-walc'h evit tennañ arc'hant diouzh ar bruderezh. Ne Ma n'eus ket a-walc'h e vo treutoc'h an niverennoù. Mennet omp forzh penaos da embann dek niverenn e 1977 hag an doare gwellañ d'hor skoazellañ a zo kavout koumananterien nevez.

E-keñver yezh e vimp laouen ivez da zegemer hoc'h evezhiadennoù. Lod ac'hanomp a zo nevezvrezhone-
lennet hag adlennet gant meur a hini. Vioù-koukoug en em sil ivez en testennoù. Ho pediñ a reomp d'hon
poent-mañ-poent hag evit kinnig deomp un doare gwelloc'h ha muioc'h diouzh ijn ar brezhoneg evit lavarout
an dra-mañ-dra. Ra vezint trugarekaet a wir galon.

Evit pezh a sell ouzh an danvez e vefe ivez ur bern traoù da lavarout. Fellout a rae deomp reiñ ur pouez bras d'ar c'heleier evel ma rae gwechall *AR BED KELTIEK* hag a oa ur gelaouenn dispar. Diaes-tre eo siwazh embann keleier pa dremen sizhunvezhioù ha sizhunvezhioù etre un degouezhadenn hag an deiz ma teu er-maez an niverenn eus **KELEIER AN NAONED** e lec'h ma kaver keloù eus an degouezhadenn-mañ. Kalz aesoc'h eo embann studiadennoù, pennadoù hir a-walc'h, enklaskoù, kelskridoù, ha n'int ket stag dre ret ouzh darvoudoù ar mare. Hogen n'eo ket sur e vezit ken plijet-se gant an doare-mañ. Amañ c'hoazh e vo prizius-tre hoc'h ali evidomp.

Staget hor boa warlene en niverenn 2 (miz C'hwevrer 1976) da embann bannoù treset eus istor *Mikael STROGOFF* diwar romant brudet Jul VERN. Ne oa ket an holl lennerien a-du tre gant an dra-mañ... Diaesterioù kalvezel o deus miret ouzhimp da genderc'hel gant an istor-mañ. Gant ment nevez **KELEIER AN NAONED** e vo kalz aesoc'h embann istor *Mikael STROGOFF*, m'emañ an darn vrasañ eus al lennerien a-du gant ar c'hinnig-mañ. Adembann a rafemp neuze pajennoù an istor adalek ar penn kentañ evit reiñ d'al lennerien an tu da strollañ goude-se an holl bajennoù d'ober ur gwir levrig.

Unan eus hon diaesterioù brasañ a zeu eus an ti-moulerzh. Pa veze liesskrivet hor c'helaouennig n'hor boa nemet da skriverezañ stensiloù ha tennañ anezho. Bremañ avat e ranker skriverezañ bepred an holl destennoù met da c'houde kas ar pennadoù d'ar mouler a gas anezho deomp en-dro kalz amzer goude evit ma aozfemp ar pajennoù. Kas a reomp dezhañ ar pajennoù prest ha kalz amzer c'hoazh goude e kas deomp ar pajennoù moulet. Chom a ra c'hoazh da blegañ anezho, d'o strollañ, d'o stagañ, d'o c'has d'an ti-post goude bezañ lakaet bandennoù warno. Evitañ da vezañ ur Breizhad eus an dibab, ne labour ket bepred hor mouler evel un den a vicher ha gwall-bell emañ Peder neg diouzh an Naoned. Setu perak ez eo ken diaes da lakaat ar gelaouenn da zont er-maez e koulz. Pediañ a reomp hol lennerien d'hon digareziñ evit an dale azo alies gant o c'helaouenn. Displijus-kenañ eo evidomp ivez... Arabat deoc'h koll fiziañs avat. Dek niverenn a zeuio er-maez e 1977 koustet pe gousto ha gant ho skoazell e c'hello **KELEIER AN NAONED** kenderc'hel da vont war-raok.

Luc'hskeudenn ar golo : Manhattan
gwelet eus ar mor
(*luc'hskeudenn gant K.N.*)

Buhez-sevenadurel e Bro-Naoned



GENVER

- 15 Fest-noz e Koerun
- 16 Sonadeg ograou ha bombard gant JEGAT hag YHUEL e Teillé (Kelc'h Keltiek Teillé)
- 19 Prezegenn gant Yann TREL-LU diwar-benn Bro-Euskadi hag an Ikastolas e Reze
- 20 Koan ar Vrezhonegerien
- 22 Fest-noz e Gwarezda gant Koroll ha Kan hag ar Brindous
- 23 Korolladeg vreizhat e Reze (Kelc'h Keltiek an Naoned)
- 25 500^{vet} deiz-ha-bloaz Anna Vreizh, sonadeg e Kastell an Duged en abardaez
- 29 Fest-noz e Lusanger gant Koroll ha Kan, an Tad Jean ha «Chantous» Misilieg

C'HWEVRER

- 5 Fest-noz e Teillé (Kelc'h Keltiek Teillé)
- 16 Taol-grenn (e galleg) diwar-benn ar gouel e Breizh (Kelc'h Keltiek Ourvez)
- 17 Koan ar Vrezhonegerien
- 19 Fest-noz e Vertou gant Dir ha Tan, an Tad Jean ha Trouzerien ar Stêr (Kelc'h Breizhek an Naoned)
- 20 Korolladeg vreizhat en Endrizel (An Endreziz ha Kelc'h Keltiek Inizi Endr)

- 21 Bodadeg sevenadurel eus Kreizenn Sevenadur Keltiek Bro-Naoned en Eskemmdi al Labour diwar-benn ar sevenadur breizhat e kêr an Naoned)
- 22/26 Sizhunvezh sevenadurel AR FALZ
- 26 Fest-noz e Santez-Lus (Ar Falz)
- 27 Gouel ar sonerien veuz e Savenneg


GEUN AR VRIER

E troad Talar Breizh, tost ouzh tuchenn Werann, en em astenn Geun ar Vrier, da lavarout eo 20 000 hektar a baludoù, ar re vrasañ e Breizh hag un istor hir ganto.


Kalz izeloc'h e oa ar mor gwechall eget n'eo bremañ ha kenderc'hel a rae traonienn al Liger 150 km pelloc'h war-du ar c'hornog 13 000 vloaz 'zo. (D'ar mare-se e oa tud o vevañ e pezh a zo bremañ Mor Breizh hag en un darn eus Mor an Hanternoz. Aber ar Saena (Seine) a yae 400 km pelloc'h eget al lec'h m'emañ hiziv an Havr Nevez... Ur goadeg stank en em astenne e lec'h ar Vrier, c'hoazh 5 000 bloaz 'zo, met kroget en doa ar mor da bignat dija abaoe meur a gantved. Dont a reas ar c'horn-bro da vezañ ur wir spouenn ha goloet

e voe ar goadeg gant lec'hid degaset gant kenc'hoari ar mor hag al Liger. A vare da vare e vez hiziv c'hoazh gwez maenaet (anvet «mortas») e Geun ar Vrier hag implijet e vezont abaoe kantvedoù evel treustennoù e tiez ar Vrieriz... Kavet ez eus bet ivez beziou ragistorel hag a ziskouez e oa tud o vevañ eno gwechall gozh.

E-pad kantvedoù ha kantvedoù e chomas ar c'horn-bro-mañ unan a-ziforc'h, o vevañ warnañ e-unan, er-maez eus kevredigezh an dud all. Kalz re baour e oa ar paludoù er Grennamzer evit dedennañ c'hoantegezh an noblañsoù. Ne oa nemet un nebeut Brieriz (ganto an hevelep anvioù abaoe kantvedoù : *Aoustin, Mahe, ha Moyon*), sellet outo alies evel gouezidi gant ar Vretoned all, evit bevañ pe gentoc'h krakvevañ



o-unan war un nebeut inizi roc'hel-lek strewet e-kreiz ar paludoù evel greun ur chapeled. Stad ar Vrier a yae a-enep d'ur reolenn gozh eus ar Gwir Breizhat hag a lavare «*N'eus douar ebet e Breizh hep un Aotrou mestr warnañ*». Ne oa Aotrou ebet er Vrier e gwirionez rak kenberc'hen net e oa ar paludoù gant annezidi ar





AR VRIER E-PAD AR GOAÑV

parreziou tro-war-dro (aet da ober 21 c'humun hiziv). Espar e oa an dra-mañ e Breizh hag en Europa a-bezh da vare ar c'haladdalc'helezh. Tud dieub eo bet ar Vrieriz a-viskoazh. Gwiriekaet e voe meur a wech kenberc'hentiez ar paludoù, da skouer e 1461 gant ul lizher-aotren sinet gant an Dug Frañsez-II, a c'heller gwelout e Dielloù-Departamant Bro-Naoned.

Kemmet o deus an traoù abaoe pemp kantved rak atizet he deus Geun ar Vrier droukc'hoantoù meur a hini a-hed ar c'hantvedoù. «Disec'herien» o deus ijinet raktresoù kaer evit disec'hañ an douaroù fraost-se ha treiñ anezho e pradoù eus an dibab evit magañ chatal pe zoken evit arat anezho !

Meur a daol-arnod a seurt-se a voe graet. Dalc'het ez eus bet soñj dreist-holl eus labourioù ar gompagnunezh DEBRAY, peogwir e voent ar re vrasañ hag ivez peogwir e c'houzañvjont skoilhoù bras, ha dreist-holl eneberezh taer ar Vrieriz.


Kaset e voe al labourioù-se da benn etre 1771 ha 1825 hep derc'hel kont eus kenberc'hentiez ar Vrieriz Dre ma ne oa perc'henn prevez ebet war an douaroù-se e voe sellet outo gant melestradur ar Roue ha gant ar gompagnunezh DEBRAY evel douaroù diberc'henn, mat da gemer ha da zifraostañ. Kleuziet e voe neuze 83 km a ganolioù dre ar paludoù hag ul lodenn vras eus ar paludoù a dremenas e krabanoù tud prevez (dreist-holl er biz hag er gevred, paludoù Krozeg ha paludoù Donz). Ne chom mui hiziv nemet 7 000 hektar kenberc'hennet er Vrier.

E dibenn ar c'hantved diwezhañ e voe degaset ur ravanell vras eus Bro-Holland da gleuziañ div ganol vras, eus an hanternoz d'ar c'hreisteiz hag eus ar reter d'ar c'hornog, hep derc'hel kont tamm ebet eus an dourhentoù a gaved dija e Geun ar Vrier. Rannet eo houmañ eta e pevar c'harter hiziv.

War-dro 1960 e voe ijinet gant teknokrated all kleuziañ ur ganol

nevez ha krouiñ atantoù-skouer da c'hounit maiz enno. Dre chañs n'int ket bet heuliet ha dilezet da vat e seblant bezañ ar mennoz-mañ.

D'ar 16 a viz Here 1970 e voe krouet Park Rannvroel ar Vrier dre un nebeud eus gouarnamant Pariz, ha d'ar 6 a viz Du 1971 e voe krouet ur sindikad d'ober war e dro, ennañ 16 kumun, an departamant, Kambrenwerzh Sant-Nazer ha Kambr al Labour-Douar e Liger-Atlantel. Ar 16 kumun-mañ a zo Sant-Nazer, ar Baol, Aserieg, Chapel-ar-Paludoù, Krozeg, Gwerann, Elviniég-Meur, Misiliég, Mouster-Naoned, Porniched, Sant-Andrev-an-Doureier, Sant-Joakim, Sant-Lifar, Sant-Malo-Gersag, Santez-Renea ha Triniég. En em astenn a ra Park Rannvroel ar Vrier war 40 000 hektar : 7 000 anezho a zo kenberc'hennet bepred gant ar Vrieriz ha 13 000 hektar a zo perc'hennet gant tud prevez (paludoù Donz da skouer). Kavout a reer er park 100 km a ganolioù ha bez ez eus 50 000 Breizhad o vevañ er park



hag en-dro dezhañ, hep kontañ 70 000 annezad e kêr Sant-Nazer.

Treuzet eo Geun ar Vrier gant ar Brived, ar stêr diwezhañ da vont e-barzh al Liger araok maz afe houmañ e-barzh ar mor. Hirder ar Brived n'eo nemet 35 km. Diwanañ a ra e biz Pont-ar-C'hastell ha diskenn a ra dre un draonienn strizh a-dreuz da Dalar Breizh. Goude se ez ae gwechall da bourmen dre ar paludoù betek tizhout al Liger, ha santet e veze ar chal hag an dichal e-kreiz ar Vrier e lec'h ma tegase ul lec'hid strujus. Hiziv ez eus bet lakaet skluzioù ha rañvelloù e pep lec'h ha ne c'hell ket mui ar mareoù aloubiñ ar paludoù. Ingal a-walc'h e chom live an dour a-hed ar bloaz ha ne vez ket mui beuzet pep tra e-pad ar goañv evel ma c'hoarveze alies gwechall. Brieriz kozh a zalc'h soñj c'hoazh eus tiez bet aloubet gant an dour e Fedrun.

N'eo ket eeun an traoù avat. Ar chaseourien a c'houlenn ul live uhel e-pad ar goañv rak gwelloc'h eo evit an houidi. Ar vagerien chatal, int, a c'houlenn ul live izel en nevez-amzer evit gellout kas o chatal da

beuriñ an abretañ ar gwellañ. Ar besketaerien diouzh o zu a c'houlenn ne vefe ket kemmet re vuan live an dour evit mirout ouzh ar pesked da vezañ kaset holl er-maez eus ar Vrier gant red an dour hag evit mirout ouzh ar vioù hag ouzh ar pesked munut d'en em gavout war ar sec'h a-greiz-holl ha neuze da vervel...

Stag eo pep tra e gwirionez ouzh an amzer. Ma ne ra ket glav a-us da draonienn ar Brived, n'eus ket dour a-walc'h e-pad ar goañv er paludoù, ha ma ra kalz glav en nevez-amzer e tle ar chatal chom er staol. Ouzpenn se ez eo bet kemmet kalz stad an traoù, evel e lec'hioù all e Breizh, gant adaoz ar gladoù ha diskaridigezh ar c'hleuzioù en-dro da Bont-ar-C'hastell. Gwechall e lakae an dour meur a sizhunvezh araok erruout er Vrier. Hiziv n'en deus mui ezhomm nemet eus un nebeut devezhioù hepken. Daoust ma tigorere an holl skluzioù da heul glaveier stank e c'hell live an dour kenderc'hel da bignat e-pad meur a eurvezh. A-wechoù, evel da skouer e-pad an hañv diwezhañ-mañ n'eo

mui ar Brived nemet ur strilhad-dour dister ha re izel e teu da vezañ live an dour er Vrier dre vras. E-pad an hañv eta e ranker a-wechoù lezel an dour sall da zont e-barzh ar c'hanolioù evit mirout ouzh ar pradoù da grinañ (rak uheloc'h eo live ar mor eget hini ar paludoù paz eo uhel ar mor). Graet e vez kement-mañ ivez a-wechoù evit stourm ouzh an tangwalloù bras a ra o reuz en taouarc'h a vare da vare e-pad an hañv... Anat eo eta n'eo ket aes merañ live an dour e Geun ar Vrier hiziv, ur gwir torr-penn ne lavaran ket !

Ur c'horn-bro digenvez ha kollet eo chomet Geun ar Vrier e-pad kantvedoù met n'eo ket ar gweledva enni unan gouez evit se. Stummet eo bet gant rummadoù ha rummadoù a Vrieriz hag emañ oc'h en em dreiñ dalc'hmat hiziv c'hoazh Abaoe ur c'hantved o deus chanterioù bras hag ur bern labouradegoù all en em staliet er c'horn-bro hag ar Vrieriz o deus dilezet tamm ha tamm labour ar paludoù evit mont da labourat e Sant-Nazer, e Mouter, e Triniég, e Donz... Chom a

reont bepred e parrezioù ar Vrier met ne dennont ket mui o bara diouti. E 1900 ez ae dija 70 % eus ar Vrieriz en oad da labourat, da c'hounit o bara er chanterioù, hag ar re all a oa artizaned ha kenwerzhourien, ha dister-tre e oa niver al labourerien-douar. Kozh-Noe eo hengoun ar saverezh-listri er Vrier rak gwelout a reer e deiz-levr an Ao. GIRODIN, person Sant-Joakim eus 1833 betek 1873, e oa 4 000 annezad e 1860 en e barrez ha 434 anezho a oa kilvizien-listri ! Bez e oa ivez 12 kabiten-lestr, 245 martolod, 43 danvez-martolod, 40mous ha 240 moraer kozh war o leve. Chanter brudet Penhoed ne voe krouet nemet e 1861... Micherourien ar chanterioù hiziv, hag a zo Brieriz un darn vras-tre anezho, a zo holl chaseourien ha pesketaerien met dister-kenañ eo niver an dud a vev diwar ar Vrier. Gwechall e oa ouzhpenn 2 500 penn-chatal o peuriñ er Vrier. Ne oant mui nemet 2 000 e 1963, 1 440 e 1968 hag 800 e

1974. War stouvañ ez a eta ar c'hanolioù hag aloubet e vez muioc'h-mui an tuchenoù gant raoskl (pezh a zo fall evit an houidi ivez rak plijout a ra dezho patouilhañ ha pourmen war ar geot pezh ne c'hellont ket mui ober paz eus raoskl e pep lec'h).

Talvoudus-kenañ eo Geun ar Vrier e-keñver buhez naturel. Ne chom ket mui kalz tuchenoù gleborek ken bras-se war an aod atlantel. Arabat krediñ avat ez eo stank-kenañ al loened hag ar plant a bep seurt enni. Gant pasianted avat e c'heller dizoleiñ dourgon (aet da get en darn vrasañ eus stêrioù Breizh), erminigoù (gwenn e-pad ar goañv) ha dreist-holl ur bern laboused : houidi, kernigelled, gloc'hed, herlegoned, ha kalz re all c'hoazh. Peskedus eo ivez ar Vrier ha kavout a reer en he dourioù sili, mandoged, bekedeg, bremed, sandred ha pesked all c'hoazh.

N'eo ket fall tamm ebet mennoz ar Park rak n'eus ket anv

d'ober eus ar Vrieriz doare Indianed evel e kornog ar vro, e Park Arvorig, na kennebeut da deurel anezho er-maez eus o ziez. Er c'hontrol e viro ar Park ouzh ar bromoterien hag ar c'hevredadoù bras d'ober o reuz er c'horn-bro-mañ. Kasaüs eo zoken n'eo ket bet staget paludoù-holen Gwerann ouzh Park ar Vrier evel ma oa bet kinniget gant ar senedour Bernard LEGRAND, Prezidant ar Park, rak en arvar bras emaint gant politikerezh Olivier GUICHARD hag e vignoned... Geun ar Vrier a chomo un dachenn gaer ha plijus evit ar Vrieriz da gentañ holl, met ivez evit labourerien Sant-Nazer, evit ar Vretoned all hag evit an douristed a zeu da dremen vakañsoù en hor bro.

Geneviève BRETECHE

O teiñ un ti-soul er Vrier

(*luc'hskeudenn gant Maurice PRIGENT*)



Levrioù gallek diwar-benn ar Vrier

- Abbé Auguste VINCE : **Notre Brière** (1965)
- Parc Naturel : **Brière hier et aujourd'hui** (1972)
- Fernand GUERIFF ha Gaston LE FLOC'H : **Terroirs du Pays de Guérande** (1961)
- René GUILLEMIN : **Mystérieuse Brière**
- Penn-ar-Bed (Nnn 69, Mezheven 1972 ha Nnn 71, Kerzu 1972) **Le Parc Naturel Régional de Brière**

Ar gartenn wellañ evit mont da bourmen dre ar Vrier gant ur c'harr, ur marc'h-houarn, ur marc'h, ur vag pe war droad, a zo kartenn an I.G.N. (aozadur gall an douaroniezh).

Daou chomlec'h evit kaout titouroù all ouzhpenn :

- **Maison du Parc**, Association des Amis et Usagers du Parc Régional de Brière, 180, FEDRUN, 44720 SAINT-JOACHIM, B.P.1

Daou chomlec'h evit kaout titouroù all ouzhpenn :

Maison du Parc
180 FEDRUN
44720 SAINT-JOACHIM

Association des Amis et Usagers du Parc Régional de Brière
B.P.1, SAINT-LYPHARD
44410 HERBIGNAC



KERHINED

PEZH A ZO DA WELOUT (E-touez ur bern traoù all)

— **FEDRUN** (e Sant-Joakim) : un enezenn e-kreiz ar Vrier, enni burevioù ar Park Rannvroel hag ur mirdi en un ti-soul o tisplegañ penaos e veve ar Vrieriz gwechall diwar an hemolc'herezh hag ar pesketaerezh. Tri danvez a veze tennet ivez ganto eus ar paludoù : ar raoskl evit goleiñ o ziez, ar foenn evit magañ o chatal hag an taouarc'h evit en em dommañ. E Fedrun e c'heller kavout bigi da feurmiñ pe dud da vont da bourmen ganto en o bag.

— **KAMERUN** (Chapel-ar-Paludoù) : stal-labour an tisaverezh

— **MARLAN-UHEL** (Sant-Andrev-an-Douereier) : herberc'hti marc'had-mat evit an dud war droad, war varc'h pe war varc'h-houarn.

— **ROZE** (Sant-Malo) : ti ar skluzier, ennañ mirdi an dour hag ar bageerezh er Vrier abaoe ar Ragistor (digor bemdez nemet d'al lun etre 10 ha 12 eur ha 14 ha 18 eur).

Bourc'h Sant-Malo a zo lec'hiet war un dorgenn, Gersag, an hini uhelañ er Vrier (13 m) ha diouti e c'heller gwelout kêr Werann ha Talar Breizh, 25 km ac'hann.

— **KERHINED** (Sant-Lifar) : ur gêriadennig-skouer, enni 18 ti, bet prenet ha kempennet gant Park ar Vrier evit diskouez buhez ar Vrieriz gwechall (digor eo un ti-soul er gêriadennig bemdez nemet al lun etre 14 ha 18 eur).

E-kichen Elvinieg, e ranker mont da welout **kastell Ranroued**, bet savet etre an **XII^{vet}** hag ar **XVII^{vet}** kantved. Dismantret eo hiziv met abaoe pevar bloaz e labour un toullad Bretoned yaouank da gempenn dismantrou ar c'hastell mañ. Meurdezus eo c'hoazh gant e c'hwec'h tour, e zor eus an **XIII^{vet}** kantved hag e porzh-diabarzh bras (42 m x 25 m).

Arabat mont re vuan dre ar Vrier rak neuze ne weler netra ha ne gaver nemet kerse. An doare gwellañ da weladenniñ Geun ar Vrier a zo mont war-droad dre ar gwenodennoù niverus hag aroueziet-mat (60 km o hirded !) pe c'hoazh mont gant ur vag a c'heller feurmiñ e Fedrun, en ostaleri Breka (e Sant-Lifar), er Chaoser Nevez (Sant-Andrev-an-Doureier) pe er Pont-Plouz (Trinieg).


AN TAOUARC'H

En em astenn a ra an taouarc'h war un darn vras eus ar Vrier hag e wiskad a zo tev a-walc'h : etre ur metr ha daou vestr. En em stummet en deus diwar geot ha plant all war-dro 2 500 vloaz arak H.S... Ur binvidigezh vras e voe evit ar Vrieriz e-pad pell amzer. E parrez Sant-Joa kim da skouer e veze eztennet 100 000 tonenn bep vloaz war-dro 1840 ! Etre 1880 ha 1888 e save c'hoazh ar c'henderc'h da 22 000 pe 28 500 tonenn hervez ar bloaz. Gwerzhet e veze taouarc'h ar Vrier en un darn vras eus Breizh ha kaset e veze dreist-holl kementadoù bras d'an Naoned gant bigi war al Liger. Ul lañs nevez a anvezas eztennadur an taouarc'h e-pad ar brezel-bed diwezhañ met n'eo mui aotreet hiziv nemet un nebeut devezhioù bep vloaz.

AR BOTOU-KOAD

En em ledet en deus implij ar botoù-koad ar vro en **XIX^{vet}** kantved. E 1836 ne oa nemet 5 botaouer-koad er Vrier met 11 e oant e 1886. Hiziv ne chom mui nemet unan, e Chapel-ar-Paludoù, an Ao. JAGU, bet ganet e 1899.

Brudet-meurbet e oa Foar ar Botoù-Koad e Sant-Nazer d'ar 15 a viz Gwengolo bep vloaz. Pep tiegezh a yae eno da brenañ botoù-koad evit ar bloaz : 6 re evit an dud en oad-gour ha 12 re evit ar vugale. Gwerzhet e voe 200 000 re votoù e foar 1891 da skouer. Implijet e veze ivez kalz botoù-koad er chanterioù. Gant an Ao. JEGU e voe graet da skouer 2 800 re votoù-koad evit al labourerien a gleuzias ar furn Joubert e Sant-Nazer...



An Ao. JEGU o labourat en e stal
(*luc'hskeudenn gant
Maurice PRIGENT*)

Bernez an NAILH

Ar Stadoù-Unanet 200 vloaz goude o diskleriadur a frankiz

Diaes eo deomp kompren ar Stadoù-Unanet hag an dud a vev enno. Ur vro vras-meurbet eo ar vro-se : bez ez eus kement a hed etre Anchorage (Alaska) ha Key West (Florida) hag ez eus etre an Naoned ha Bangkok ! A orin europat eo an darn vrasañ eus an dud met disheñvel-krenn int diouzhimp e gwirionez evel m'eo dije o hentadoù lezet a-dreñv dezho, en ur dreuziñ ar Meurvor Atlantel, ur bern talvoudoù hag hengounioù eus ar bed kozh evit degemer doareoù nevez... Diaes eo kompren ar Stadoù-Unanet e gwirionez.

Techet e vezer koulskoude en Europa da varn anezho krenn-hakrak, hep o anavezout. Ur bern tud hag a chom diseblant a-hend-all ouzh o amezeien hag ouzh an dizingalderioù ha direizhederioù a gaver er gevredigezh-mañ, a soñj dezho ez int tud eus an tu kleiz, ha koustiañs vat ganto, peogwir ez int a-enep d'ar Stadoù-Unanet. Gwelout a reer e Bro-C'hall politikourien eus an tu dehou evel d'ar Stadoù-Unanet. Gwelout a reer e Bro-C'hall politikourien eus an tu dehou evel Michel DEBRE hag eus an tu kleiz evel Michel ROCARD unvanet a-enep d'an «Amerikaned». Barn a reer ar vro-se diwar zarvoudoù evel ar brezel er Viet-Nam, itrikoù ar C.I.A. e Bro-Chile hag an afer Lockheed. N'eo ket brav-brav an holl istorioù-se met arabat disoñjal krizderioù ar C'hallaoued en Aljeria, an afer Ben Barka, kammdroioù an Ao. Dassault hag ur bern istorioù divalav all ha n'int ket bet diskoulmet morse. Arabat disoñjal ez eo bet kroget ar brezel er Viet-Nam gant ar C'hallaoued, dre sotonni ha brasoni un nebeut anezho. Divalav eo an impalaerouriezh e pep lec'h hag ar Stadoù-Unanet siwazh n'eo deus ket kentelioù da zegemer digant Europiz.

Arabat disoñjal e voe krouet ar vro-se gant tud dieub o tec'hout diouzh Europa peogwir e oant o vervel gant an naon pe heskinet evit o mennozioù. Tud ar vro-se a voe e penn ar stourm evit frankiz ha gwirioù mabden, araok an Dispac'h

Gall hag araok dihun ar broadelezhioù. Diskleriadur a frankiz ar Stadoù Unanet a chom unan eus testennoù bras an Istor ha digoret en deus an hent da ziskleriadur gwirioù mabden. Arabat disoñjal kennebeut stourm ar Stadoù-Unanet



Madison Avenue e Manhattan
(luc'hskeudenn gant K.N.)



Kirri-tan berniet er Stadoù-Unanet
(luc'hskeudenn I.M.F.)

net evit ar frankiz hag an demokratelezh. Hepto e vefemp c'hoazh moarvat o plegañ dindan yev ponner ar faskouriezh a oa o ren en Europa 35 vloaz 'zo. A-drugarez dezho e voe adsavet armerzh Europa ar C'hornog goude dismantr ar brezel-bed diwezhañ...

Perzhioù mat ha perzhioù fall o deus ar Stadoù-Unanet hag an dud a vev enno. Ne fell ket din barn anezho met displegañ hepken un nebeut traoù am eus gwelet, klevet pe santet o vont du-hont. Ne lavaran ket ez anavezan ar Stadoù-Unanet, tamm ebet. Me gav din er c'hontrol ne anavezan koulz lavaret netra diwar o fenn. Ur vuhez-pad ne vefe ket a-walc'h evit gweladenniñ ar vro-se en he fezh. Ar chañs am eus bet hepken, pa oan studier c'hoazh, da vont da Amerika e 1969 da labourat e-pad daou viz en ul labouradeg e-kichen Los Angeles ha da vevañ ivez en un tiegezh a vicherourien eno. Distroet on d'ar vro e 1971 pa oan oc'h ober va amzer-soudard evel kelenner e Bro-Vec'hiko ha bevet em eus

e-pad ur pennadig e-touez studierien Columbia, skol-veur brudet kêr New-York. Tro am eus bet nevez 'zo da zistreiñ d'ar vro-se evit ur veaj a vicher, e miz Du 1976, daou zevezh dres goude trec'h Jimmy CARTER en dilennadegoù... N'eo ket a-walc'h evel-just evit anavezout ur vro. Diaes e vefe d'un Alaman pe d'un Islandad skrivañ pennadoù sirius diwar-benn Breizh goude bezañ tremenet enni un nebeut sizhunvezhioù hepken, div pe deir gwech... War c'horre eta e chomo moarvat va danevell ha va evezhiadennoù.


*
* *

Kuitaet hon eus Kastell-Bougon, aerborzh an Naoned gant ur Boeing 707 eus an aergompagnunezh Pan Amerikan Airways d'ar 4 a viz Du da 13.30 hag erruet omp en aerborzh John Fitzgerald Kennedy, war-dro 16.30, da lavarout eo goude 8 eurvezh beaj, peogwir ez eus 5 eurvezh dale etre Breizh ha

New-York.

N'eo ket aes tremen harzoù ar Stadoù-Unanet peurliesañ, ha gortoz a reer kalz amzer o tremen dirak ar bolis hag ar valtouterien. Difenet-groñs eo degas plant ha loened, moarvat gant aon rak ar c'hleñvedoù. Ar boliserien a gemer ho pasport hag a furch e-pad pemp munutenn e pikol levrioù, miliadoù ha miliadoù a anvioù enno, evit gwelout hag eñ n'emañ ket hoc'h hini en o zouez, anvioù floderien, sponterien, marc'hadourien dram, torfedourien, h.a... Kalz strishoc'h eo ar c'hontrol war harzoù ar Stadoù-Unanet eget war harzoù broioù europat ha n'eo ket souezhus rak ur wech m'en deus tremenet, e c'hell un den steuziñ er vro ec'hon-se ha ne vo adkavet polis pe Stad n'he deus ket ar gwir da dremen er Stadoù all zoken evit redek war-lerc'h forbanned, nemet gant un aotre a-ziforc'h, hag ivez an F.B.I. evel-just. A-walc'h a dorfedourien a zo dija er vro hep klask degemer re all...

Pell a-walc'h emañ an aerborzh



Manhattan : Aozadur ar Riezoù
Unanet (United Nations), war
an tu dehou, ar skrapet-oabl
Chrysler

(luc'hskeudenn gant K.N.)

Kennedy diouzh kreiz-kêr New-York hag izel a-walc'h eo an tiez e bannlevioù Queens ha Bronx. Gant o liorzhoù, o balioù bras, o labouradegoù teñval, n'eo ket disheñvel-tre ar bannlevioù-se diouzh re Glasgow, London pe Liverpool. Sebezet e vezer diouzhtu, sabatuet zoken, gant ment an traoù dre vras, gant an niver a girri, gant ledander an hentoù. Pep tra a seblant bezañ brasoc'h, ledanoc'h, hiroc'h. Hag a-greiz-holl setu ur renkennad skraperien-oabl o kreskiñ muioc'h-mui war an dremmwel : Manhattan !

Pontoù ha ribouloù niverus a gas d'an enezenn-se met ret eo paeañ evit mont da Vanhattan. Souezhus eo an dra-mañ evit Bretoned peogwir n'hon eus ket da baeañ gwirioù-treizh c'hoazh e Breizh evit mont war an hentoù hag ar pontoù (nemet evel-just Pont an Aber e-kichen Sant-Nazer hag ar pont war ar stêr Oded e-kichen Benoded, ma ne fazian ket). Er Stadoù-Unanet avat ez eus gourhentoù bras e pep lec'h met e pep lec'h e ranker paeañ evit tremen.


N'eo ket gwall uhel ar gwirioù-treizh peurliesañ : 40, 50, 60 cents (etre 2 ha 3 F). Santout a reer diouzhtu roll ha pouez an embregerezhioù prevezh e buhez ar vro...

N'eo ket New-York kêr vrasañ ar bed. Tokyo, Sao Paulo, Mec'hiko ha Buenos-Aires da skouer a zo pobletoc'h. War-dro 8 milion a dud a vev memestra er gêr vras-mañ (ouzhpenn div wech poblañs Vreizh dasparzhet etre pemp rann vras :

Brooklyn (Kings)	2 600 000
Bronx	1 470 000
Manhattan	1 540 000
Queens	1 990 000
Staten Island (Richmond)	300 000

N'eo ket poblañs New-York ur standilhon mat eus poblañs ar Stadoù-Unanet. Ur gêr gant he doareoù dezhi hec'h-unan ne lavaran ket, ur porzh digoret war ar mor bras ha troet war-du Europa hag ar bed kozh, un nor evit milionoù ha milionoù a repuidi hag a embroerien abaoe ur c'hantved. Setu perak un

annezad e-touez tri a zo bet ganet en estrenvro pe a zo mab da dud ganet en estrenvro. Gant daou vilion a Yuzevien, stank dreist-holl er Bronx, ez eo New-York kêr yuzev brasañ ar bed, kalz brasoc'h eget Tel-Aviv ha Jeruzalem peogwir ez eus enni tost kement a Yuzevien hag e Stad Israel en he fezh ! Bez ez eus ivez e kêr New-York 12 % a vorianed, 7 % a dud a gomz spagnoleg hag a zo genidik eus Porto-Rico, Kuba pe Vec'hiko (ur bern enskrivadurioù foran e New-York a zo divyezhek en abeg da se, spagnolek ha saoznek) ha 2 % a dud a orin aziat (Japaniz ha Sinaiz). New-York a zo ivez ur porzh bras, porzh kentañ ar Stadoù-Unanet hag eil porzh ar voull-douar goude Rotterdam. War zigreskiñ ez a pouez New-York e-keñver peurrest ar vro (evel ma vo gwelet diwezhatoc'h) met chom a ra c'hoazh an hini gentañ evit an ijinerezhioù greantel hag ar c'henwerzh (e kêr New-York emañ da skouer ur c'hwec'hvedenn eus ar genwerzhourien-dre-vras, a gaver er Sta-



doù-Unanet). War greskiñ ez a niver ar burevioù ivez. E Manhattan hepken ez eus bet savet 1,3 milion a vetradoù karrezek burevioù etre 1945 ha 1973 ! Gwir eo o deus an holl gevredadoù bras o sez hag o

fenngarterioù e Manhattan : Panam Chrysler, General Motors, Standard Oil, ha kalz re all...

E Stad New-York emañ kêr New-York met ar Stad-mañ n'eo ket mui an hini vrasañ abaoe un

nebeut bloavezhioù. Kalifornia a zo tremenet e-biv dezhi gant 22 vilion a annezidi dirak 18,5 milion e Stad New-York...

(da genderc'hel)

Keleier

Bro-Naoned

NIJEREZED O VONT DA AOSTRIA

Adalek an 23 a viz Genver ha betek ar 27 a viz C'hwevrer e yelo bep sadorn un nijerez DC 9 eus an aergompagnunezh Austrian Airlines da gas Bretoned eus aerborzh Kastell-Bougon betek Aostria evit reiñ dezho an tu d'ober ski e Zell-am-See (760 m) pe e Sallbach (1 005 m).

UN TOULLBAC'H NEVEZ HEP DALE EN NAONED

Kozh-tre eo toullbac'h an Naoned (daoust ma n'eo ket ken kozh hag hini ar ganaouenn) ha dreist-poblet eo rak lakaet e vez ennañ a-wechoù 300 prizoniad pa n'eus plas e gwirionez nemet evit 250. Divizet ez euz bet sevel un toull-bac'h nevez en hanternoz da gêr an Naoned ha kroget en deus al labour e miz Du 1976. Ne vo ket ur savadur bras gant mogerioù uhel evel an hini kozh met savet e vo meur a savadur en ur park bras, dek hektar e c'horread. Peurechu e tle bezañ e 1979 ha degemer a c'hello 448 prizoniad. Koustañ a raio 66,5 milion a lurioù gall.

Ezhomm a zo eus un toullbac'h nevez e Sant-Nazer ivez peogwir eo bet diskaret an hini kozh e-pad an hañv tremenet gant ur prizoniad en deus enaouet un tangwall ennañ.

KERE : UR VICHER O VONT DA GET ?

War rouesaat ez a niver ur bern artizanet e Breizh, en o zouez ar gereon. E 1967 e oa 351 stal-gere e Liger-Atlantel (en o zouez 95 e kêr an Naoned). Nav vloaz goude ne chom mui nemet 190 anezho (52 en Naoned ha 10 hepken e Sant-Nazer). An darn vrasañ anezho a zo tud kozh a-walc'h ha ne seblant ket ar re yaouank bezañ dedennet ken gant ar vicher-mañ.

PONT AN ABER

D'an 18 a viz Here 1975 e voe digoret ar pont war aber al Liger, etre Sant-Nazer ha Sant-Brewen. Daoust d'ar gwirioù-treizh uhel-meurbet (ur vezh ruz !) ez eo tremenet 791 772 karr warnañ e-pad ar bloavezh kentañ.

AN DILABOUR OC'H OBER E REUZ

Ouzhpenn 23 000 den en em gav dilabour e Bro-Naoned hiziv ha grevusoc'h eo stad an traoù eta enni eget e rannvroioù all Breizh. E korn-bro Sant-Nazer hepken ez eus ouzhpenn 5 000 den dilabour, an darn vrasañ tud yaouank dindan 25 vloaz. Ar re yaouank, ar merc'hed, an dud ouzhpenn 50 vloaz dezho, al labourerien hep ur stummadur resis eo ar c'houzañv ar muiañ eus an enkadenn armerzhel. An darn vrasañ eus an embregerezhioù ne dutont mui den ebet, zoken evit kemer lec'h ar re a ya war o leve. Digresket en deus eta niver an implijoù en ijinerezhioù greantel eus 3 000 warlene e Liger-Atlantel. Ur bern labouradegoù bihan pe etre a zo aet da get, evel da skouer DUBO e kêr an Naoned (192 vicherour dilabour). Dic'hopret e vez ur bern labourerien gant aferioù all, da skouer 50 gant ROUL, 95 gant PARIS, 112 gant CARNAUD, h.a. Kalz micherourien a labour bremañ nebeutoc'h eget 40 eurvezh pep sizhun ha, da heul, e vezont paeet nebeutoc'h ivez, pezh a laka buhez o ziegezhioù da vezañ diaes-kenañ.

PORZH NAONED SANT-NAZER KENDAONET GANT AL LEZ-VARN

C'hwec'h miz 'zo e voe dic'hopret ar rener kenwerzhel eus Porzh Naoned Sant-Nazer, an Ao. Yves LAINE, war zigarezhioù ekonomikel. E gwirionez e felle da bennoù bras

ar porzh en em zizober dioutañ en abeg d'e vennozhioù breizhat ha d'e stourm kalonek e penn al luskad B-5 evit ma chomfe Bro-Naoned stag ouzh peurrest Breizh. Kendaonet eo bet ar porzh gant lez-varn an Naoned da reiñ dezhañ 30 000 F digoll.

SUKR O TEGOUZHOET E PORZH AN NAONED

Abaoe miz Kerzu ez eus listri o tegouzhout e porzh an Naoned gant kargadoù sukr o tont eus enezenn ar Reunion, e Meurvor India. Eostet e vez ar gorzenn-sukr eno en diskar-amzer ha ret eo kontañ war-dro 15 devezh evit ar veaj (8 devezh nebeutoc'h eget un nebeut bloavezhioù 'zo abaoe ma c'hell tremen adarre al listri dre Ganol Suez).

Gortozet e vez 56 000 tonenn sukr evel-se, degaset gant listri 7 000 pe 8 000 tonenn. E-pad an hañv e tegemer ivez porzh an Naoned sukr o tont eus an Antilhez (Guadeloupe) e lec'h ma vez eostet etre miz Meurzh ha miz Eost (ne bad ar veaj betek an Naoned nemet 10 pe 12 devezh).

Gwasket e vez ar gorzenn-sukr e sukrerezhioù er Reunion pe en Antilhez evit tennañ diouti ar sukr. Kaset e vez da Vreizh ar sukr-mañ a zo krañ ha rous. En Naoned e vez tennet dioutañ er purerezh BEGHIN SAY (ar purerezh-sukr diwezhañ a chom en Naoned, pa oant seizh gwechall) sukr gwenn, e poultr hag e tammouigoù, ha triakl a dalv d'ober rom e lec'hioù 'zo (e Bourdel da skouer) pe boued-chatal.

POBLANS AN NAONED O TIGRESKIN

Etre 1968 ha 1975 he deus kêr an Naoned kollet 3 600 annezad. Tremenet eo he foblañs eus 260 244 da 256 693 annezad. Kresk naturel

ar boblañs a zo bet eus 19 400 den met 23 000 annezad a zo aet kuit diouti. Buant-re he deus kresket poblañs ar c'humuniou en-dro da gêr an Naoned hag ouzhpenn 450 000 den a vev bremañ e tachad kêrel an Naoned.

TREIZHIDELL AR PORZH O VONT WAR-RAOK

Da heul an enkadenn armerzhel he doa digresket eus 15 % an dreizhidell eus porzh Naoned-Sant-Nazer e 1975 met kresket he deus adarre kalz warlene :

- 1974 14 654 049 tonenn
- 1975 12 432 751 tonenn
- 1976 15 316 000 tonenn

Digempouezet-tre eo an dreizhidell-mañ rak degemeret eo bet ar

porzh 13 479 000 tonenn met n'eo bet kaset dioutañ nemet 1 837 000 tonenn. Degemeret eo bet warlene 350 000 tonenn prenn o tont eus Afrika (Gabon), eus Brazil hag eus ar Reter Pellañ (Filipinez).

An tireoul a ya d'ober 77,6 % eus an dreizhidell hollet. Degemeret eo ez eus bet 10 680 000 tonenn direoul e 1976 ha kaset eo bet diouzh ar porzh 1 208 000 tonenn (kenderc'hadoù puraet e Donz : strilheoul, h.a...).

AR CHANTERIOU EN ARGOLL?

Chalus-tre eo amzer da zont ar chanterioù DUBIGEON-NORMANDIE e kêr an Naoned rak n'o deus

ket mui a labour evit ar mizioù a zeu. Emaint oc'h echuiñ ur mordreizher bihan (550 tonenn) evit an Unaniezh Soviedel hag ur pevare lestr-samm (30 000 tonenn), *Stolt Integrity* e anv, evit Norvegia. Emaint o sevel ivez ur pempvet lestr-samm evit Norvegia, *Stolt Tenacity*, ha div splujerez evit Su-Afrika. Goude-se ne chomo mui nemet ul lestr-chalboter (3 500 tonenn) da sevel evit ATA WALON/SFTM ha marteze daou lestr-samm diwezhañ evit Norvegia, da vezañ echuet e 1978. Goude ne ouzer ket hag ur bern tud en em c'houlenn hag eñ n'eo ket bet kendaonet chanterioù an Naoned gant tekno-kredet Paris...



GREUNVA AR ROC'H MAORIS

Savet ez eus bet daou vloaz 'zo ur greunva bras er Roc'h-Maoris, war ribl al Liger, evit degemer ar greun (gwinizh, heiz, maiz) ezporzhiet pe enporzhiet dre borzh Naoned-Sant-Nazer. Berzh-mat en deus graet ha leun eo dalc'hmat pe dost ha setu perak ez eo bet divizet gant ar c'hevredad a ra war e dro, SONASTOCK e anv, daougementiñ ar greunva-mañ. Tremen a raio e zalc'had eus 40 000 tonenn da 80 000 tonenn pa vo echu al labourioù, e dibenn miz C'hwevrer moarvat. Ur savadur uhel-tre (40 m) eo ar greunva-mañ hag a-drugarez da ardivinkoù modern-tre e c'hell bezañ leuniet pe c'houllonderet buan-tre (tizh : 700 tonenn dre eur!).

CHAOSER AN DIVAD EN ARVAR

Er reter d'an Naoned e oa techet gwechall-gozh al Liger da guitaat he naoz bep vloaz evit mont da veuziñ un dachennad vras war-du ar c'hreisteiz. Evit gwareziñ 2 700 hektar a barkeier e voe savet ur chaoser bras a-hed 15,9 km. Deuet eo an dachennad-mañ da vezañ, dreist-holl abaoe tregont vloaz, ur gwir liorz e lec'h ma vez gounezet legumaj ha bleunioù a-hed ar bloaz, dindan an amzer pe e-barzh tiez-gwer. Unan eus pinvidigezhioù brasañ Bro-Naoned eo al liorzhoù-mañ. Un hent strizh ha hoalus d'ar selloù, a heuilh ar chaoser-mañ ha kavout a reer en e hed tiez-debriñ brudet...

Breizh

UN TIMBR «BRETAGNE»

Un timbr «Bretagne» a zeuio er-maez en tiez-post d'an 22 a viz C'hwevrer. E briz : 2,40 F.

LABOURERIEN DIC'HOPRET

Freuzstal en deus graet ar c'hevredad CMC-DUFOUR e Kemper ha 125 micherour en em gav dilabour.

Implijet e vez 500 den gant ar paperezhioù BOLLORE e Skaer hag e Kemper met emaint o vont da zic'hoprañ 195 micherour.

Abaoe meur a vloaz siwazh ez a war fallaat stad ar chaoser-mañ da heul labour ar chal hag an dichal, ar gwagennoù graet gant ar bigi o tremen ha dreist-holl, da heul ar ravanellidigezh dibaouez eus naoz al Liger gant bigi a denn traezh diouti.

Divizet ez eus bet nevez 'zo d'ober labourioù bras evit kreñvaat ar chaoser ha berzet e vo ravanelliñ naoz al Liger etre an Naoned hag Oudon diwar-vremañ.

AR PELLGOMZ E BRO-NAONED

Abaoe ar c'hentañ a viz Genver ez eo emgefreak ar pellgomz dre Liger-Atlantel a-bezh, da lavarout eo n'eus ket mui ezhomm da c'houlenn dre gomz niverenn ar c'hendivizer digant ur plac'h en ti-post. Ne vo ket kollet kement a amzer da bellgomz d'ar penn all eus an departamant... Hepdale e vo tu ivez da c'hervel tud en estrenvro en un doare emgefreak ivez.

Un araokadenn a bouez eo kement-mañ met n'eo ket re abred. Emgefreak eo dija ar pellgomz en darn vrasañ eus broioù all Europa abaoe bloavezhioù ha bloavezhioù ha n'eo ket diaes tamm ebet gervel un niverenn eus Kastellbrient, Klizun pe Ansiniz diouzh Kêrdiz, Frankfurt pe Milano.

3 RABIN E LANVEURZH MET SINAGOGENN EBET

Lanveurzh pe Sant-Meurzh-Gallia, ma kavit gwell (Saint-Mars-la-Jaille), a zo ur vourc'h vihan war harzoù Breizh, war-dro 2 000 ane-

zad enni. Kavout a reer un iliz-barrez e-kreiz ar vourc'h gant daou veleg katolik evit ober war he zro met bez ez eus ivez tri rabin o chom er vourc'h daoust ma n'eus Yuzev all ebet e Lanveurzh !

E gwirionez, ne chom ket ar rabined-mañ e Lanveurzh a-hed ar bloaz. Erruout a reont eus Paris d'al lun ha mont kuit d'ar gwener. Maget e vez kalz yer e korn-bro Lanveurzh ha savet ez eus bet lazhdioù er vourc'h, o reiñ labour da 150 den. Unan eus al lazhdioù-mañ a zo disheñvel a-walc'h diouzh ar re all, ul lazhdî «kasher» eo. Krouet e voe pevar bloaz 'zo ha rein labour da 30 Breizhad en ur bourvez kig-yar «kasher» d'ur bern kigerezhioù darempredet gant Yuzevien dre Vro-C'hall a-bezh. Hervez reolennoù o c'hravez (relijion) e tle al loened bezañ peurziwadet ha ret eo d'ur rabin bezañ enno da eveshaat al labour. Setu perak ez eus tri rabin war ar sizhun e Lanveurzh. N'o deus sinagogenn ebet met ur chapelig o deus aozet a-us d'al lazhdî evit lavarout o fedennoù.



D'ar 4 a viz Genver o deus labourerien TRANSOCEAN e Brest paouezet da ac'hubiñ al labouradeg goude dek mizvezh stourm. Krouet e oa bet al labouradeg-mañ e Brest e 1963 gant skoazell ar gouarnamant. Freuzstal a reas e miz C'hwevrer warlene ha 260 micherour en em gav dilabour hiziv.

LABOURADEGOU NEVEZ

Emañ ar c'hevredad saoz LIN-PAC (an eil kevredad brasañ dre ar bed evit ar pakataerezh) o vont da sevel ul labouradeg e Noal-Pondivi.

Reiñ a raio labour da 100 Breizhad adalek miz Genver 1978. Al labouradeg-mañ a raio pakadurioù-vioù e mezelloù. E departamant ar Morbihan ez eus ur marc'had bras evit seurt pakadurioù peogwir ez eus 2 vilion a yer-dozverezed a ro 400 milion a vioù bep vloaz.

Kregiñ a reas ar c'hevredad ONNO d'ober kilhevardon en un doare greantel e Pluniav e 1946. E 1957 e krouas ul labouradeg vras e Pondivi, e lec'h maz eus bremañ 400 den o labourat. Emañ o vont da grouiñ ul labouradeg nevez e

Sant-Meven-Meur, o reiñ labour da 100 den. Al labouradeg nevez-se a dreuzfurmo 2 500 tonenn gig-moc'h bep vloaz.

AR C'HENDALC'H KELTIEK ETREVROADEL

Ar C'hendalc'h Keltiek Etrevroadel a vo dalc'het hevlene e

Bro-Skos, e kêr Stirling, renet gant ur c'huzul-kêr broadelour abaoe bloavezhioù. Padout a raio ar c'hendalc'h-mañ eus ar 15 betek an 20 a viz Eost 1977 ha tremen a raio er skol-veur. Lojet ha maget e c'hello bezañ an dud enni evit ur priz marc'had-mat. Ker e kousto avat ar veaj rak gwall bell emañ


Stirling diouzh Breizh. Anv a zo da aozañ ur veaj a stroll. Titouroù a c'heller goulenn digant Loig CHAPEL, Roc'h ar Bleiz, 29210 MON-TROULEZ.

A-ZIVOUT AR C'HELLOUENNOU PEMDEZIEK E BREIZH

Ur faziig am eus graet er pennad am eus savet diwar-benn ar c'hellaouennoù pemdeziek e Breizh, hag a zo deuet er-maez en niverenn 7 (Eost-Gwengolo 1976). N'eo ket div gelaouenn pemdeziek a zeue er-maez en Naoned e 1944-1945, teir ne lavaran ket, hag e 1950 e oa div gelaouenn ha n'eo ket unan hepken (taolenn, p. 16). Tro am eus hiziv da reiñ d'al lennerien un nebeut titouroù ouzhpenn diwar-benn ar c'hellaouennoù embannet e kêr an Naoned. Ne gomzin ket avat eus **Le Breton** nag eus **Le National de l'Ouest** (renet gant ar Republikan Victor MANGIN), kellaouennoù aet da get er c'hantved tremenet.



Le Populaire a voe krouet en Naoned d'ar 5 a viz Kerzu 1874 ha dont a reas er-maez da gentañ div wech ar sizhun. Dont a reas da vezañ pemdeziek diwezhatoc'h hag



hec'h anv a zeuas da vezañ **Le Populaire de l'Ouest** d'ar 26 a viz Ebrel 1918. Paouez a reas dont er-maez d'ar 31 a viz Eost 1939 ha ne zeuas er-maez en-dro nemet d'ar 24 a viz Meurzh 1945 dindan renerezh Gaston VEIL marvet e 1947. E miz Genver e teuas da vezañ **l'Eclair** ha kouezhañ a reas e krabanoù Robert HERSANT e 1960.

La Résistance de l'Ouest a gemeras lec'h ur gelaouenn gozh **Le Phare de la Loire** (a oa bet



hec'h anv betek 1852 **Le National de l'Ouest**). Berzet e voe **Le Phare de la Loire** e 1945 dre m'he doa embannet keleier a-du gant an Alamaned e-pad ar brezel. Renet e voe da gentañ gant Henri MAURICE, hag a oa bet bac'het e kamp Dachau, ha da c'houde, adalek 1959, gant Claude BERNEIDE-RAY-

NAL, hag en deus bet ivez da c'houzañv kalz e-pad ar brezel. Ar brud en deus redet nevez 'zo e-touez kellaouennerien **Presse-Océan** (anv nevez ar gelaouenn abaoe 1960) e oa an Ao. BERNEIDE RAYNAL o vont da werzhañ e gelaouenn da Robert HERSANT ivez. Kement-mañ a zegasfe buan steuzidigezh **L'Eclair** ha **Presse-Océan** evit lakaat en o lec'h hepken **Le Figaro** Edition de l'Ouest (embannadur ar c'hornog).

Div gelaouenn all a voe krouet goude ar brezel met mont a rejont da get o daou :

- **L'Avenir de l'Ouest** a voe krouet gant ar c'horonal FELIX, kannad Liger-Atlantel, d'ar 15 a viz Meurzh 1945 ha steuziañ a reas d'an 10 a viz Eost 1948.

- **Le Nouveau Phare de Nantes et de l'Atlantique** a oa ur gelaouenn gatolik krouet d'ar 6 a viz Du 1948. Kemm a reas hec'h anv d'ar 27 a viz Du evit dont da vezañ **Le Nouveau Journal de l'Ouest**, hag adarre d'an 11 a viz Kerzu evit dont da vezañ **Le Journal de la Loire**. Ar 145^{vet} niverenn a voe an hini diwezhañ holl d'an 28 a viz Ebrel 1949.

E. MENARD

Ernest MENARD

N'hellomp ket tremen hep kreizennoù derc'hanel

Embannet ez eus bet nevez 'zo e-barzh **KELEIER AN NAONED** ur pennad a-enep d'ar c'hreizennoù derc'hanel (nukleel) ha diskouez a rae ar pennad-mañ pezh a soñj e gwirionez ur bern emsaverien e Breizh, an darn vrasañ anezho zoken hep mar ebet. Meur a abeg o deus da vezañ a-enep d'ar c'hreizennoù-se, lod anezho a zo sirius ha lod all n'int ket. Tud 'zo pe strolladoù 'zo a glask implijout ar gudenn-mañ evit palioù ha n'o deus netra da welout gant mad an dud met tud a youl vat ez eus dreist-holl en o zouez. Taer-tre e teuont avat da vezañ kerkent ha maz eus anv eus ar gudenn-mañ ha tud 'zo a zo prest zoken da derriñ fas ar re na soñjont ket evelto. Ret eo d'am soñj chom habask ha sellout ouzh ar gudenn c'hrevus-mañ kuit a zrivliadoù, evit gwelout petra a zo mat e gwirionez evit Breizh hag evit ar Vretoned, ha petra a c'hellomp ober.

Ret eo gwelout un dra da gentañ penn. Emañ hon armerzh hiziv e dalc'h an tireoul (eoul-maen) Evit mont gant hor c'hirri, tommañ hon tiez, ken^derc'h añ tredan, kas en-dro kement ardivink a zo hiziv en hon tiez pe el labouradegoù, e reomp gant tireoul pe gant tredan kenderc'het gant tireoul (e dredanvaou Chevire ha Kordemez, e Bro-Naoned, hag int da gas tredan dre Vreizh a-bezh ha zoken da Gornog Bro-C'hall). N'hellomp ket diskoulmañ ar gudenn en ur lavarout hepken : «ne ra forzh, n'hon eus ket ezhomm eus an holl draoù-se, kalz evurusoc'h e vefe pep hini hep kirri na tredan». Un

nebeut hiniennoù romantel a c'hell soñjal evel-se ha mont da zesevel givri e Menez Arre met anat eo n'eo ket prest pobl Vreizh en he fezh da zilezel perzhioù mat ar vuhez modern. Kilstourmerien eo ar re a ginnig ur seurt pal rak n'eus ket tu da nac'h ez eus bet graet araokadennoù sebezus war bep dachenn eus buhez mabden da heul an araokaat kalvezel (teknik). Arabat dreistkaeraat an amzer dremenet. Kriz spontus eo bet buhez mabden e-pad kantvedoù ha kantvedoù gant kleñvedoù-red spontus ha naonegezhioù bras oc'h ober o reuz dibaouez. N'hon eus ket ar gwir da ginnig ur seurt tonkad adarre d'hor c'henvroiz. Kenderc'hel a raio forzh penaos broioù all ar bed da vont war-raok ha, ma chomomp war o lerc'h, e kollo Breizh da vat an tammig frankiz ha personelezh a chom ganti hiziv c'hoazh. Arabat e vefe ober eus hor bro un dezerzh isdiorreet e lec'h ma ne vo ket mui plas ebet evit ar Vretoned. Ret eo stourm er c'hontrol evit difenn barr-bevañ ar Vretoned ha labourat dalc'hmat da grouiñ obererezhioù nevez hag implijoù niverus evit an holl, rak chom a ra an dilabour hag an divroañ ar gwalennoù gwashañ gouzañvet gant hor bro.

N'hon eus ket glaou e Breizh (pe evit bezañ resisoc'h, n'hon eus ket kalz ha diaes-kenañ e vefe da eztennañ) ha n'hon eus ket tireoul kennebeut. Kredet ez eus bet e-pad ur pennad e oa gweleadoù-tireoul e strad «Mor Hirwazh» met dipitus-tre eo bet an imbourc'h betekhenn. Ne gredan ket, tamm ebet, e vije bet dizoloet eoul ha dalc'het kuzh ar

c'heloù gant aon rak reiñ lañs d'an Emsav e Breizh (evel ma c'hoarvez e Bro-Skos) pe evit abegoù ken souezhus all. Diaes e vije bet da devel war ur seurt dizoloadenn. Gwir eo n'eus bet graet nemet tri zoull ha marteze e vo kavet eoul hag aezhenn un deiz e lec'hioù all e Mor Breizh, tostoc'h moarvat ouzh aodoù Kernev-Veur^r ha Bro-Saoz, pa vo bet diluziet kudenn an harzoù etre Gallaoued ha Saozon. Met forzh penaos ne vo ket kavet kement ha tireoul hag ez eus bet kavet e Mor an Hanternoz ha koustañ a raio ker-ruz da eztennañ. Arabat kontañ re war an tireoul-mañ eta.

Eus pelec'h e teu an tireoul bevezet e Breizh hiziv ? Eus pelec'h e teu an tireoul degemeret e purerezh Donz, e-kichen Sant-Nazer (barregezh-purañ : 8 500 000 tonenn) pe en hini a zo stag outañ, purerezh Gwern, e-kichen Roazhon (barregezh-purañ : 1 500 000 tonenn) ? Dont a ra eus Libia, Aljeria ha broioù eus Plegmor Arabia (Koweit, Abou Dhabi, Katar, Arabia Saoudat). Etre 1960 ha 1970 ez eo chomet stabil a-walc'h priz ar varilh eoul, war-dro 1,80 dollar. E miz Here 1973 e save da 5,12 dollar ha tremenet eo a daol-trumm da 11,65 dollar e miz Kerzu 1973, da heul ar brezel etre Israel hag e amezeien arabat. Er broioù arabat e kaver un darn vras-tre eus gweleadoù tireoul ar voulldouar. Fellet o deus dezho kastizañ broioù ar c'hor-nog, hag a oa dre vras a-du gant Israel.

Kemplezh ha luziet-tre eo an afer e gwirionez. Kreskidigezh

sebezus ar prizioù a zo gwelet mat gant an Unvaniezh Soviedel a zo enni eoulvaezioù bras-kenañ (Bakou, Bakou Nevez, traonienn an Emba, h.a.) hag a zo a-enep da Israel. Ezporzhiañ a ra eoul war du broioù all, en o zouez broioù Retereuropa, ha seul uheloc'h e vo ar prizioù, seul welloc'h e vo an traoù eviti. Gwelet mat eo bet ivez kreskidigezh ar prizioù gant tud 'zo er Stadoù Unanet, o vezañ maz eo koustusoc'h eztennañ eoul eus an douar e Teksas pe en Alaska pe c'hoazh eus tufoù terdouarek (chistoù bitumek) eget er Reter-Tostañ. Seul uheloc'h ez a priz an tireoul ha seul welloc'h ez eo ivez, en un doare, evit Norzamerika. Ret eo komz ivez eus ar «seizh breur», ar seizh kevredad bras hag o deus en em glevet abaoe degadoù evit chom mistri war marc'had-bed an tireoul : Standard Oil of New-Jersey, Shell, Texaco, Gulf Oil, Mobil Oil, Standard Oil of California ha British Petroleum. N'int ket chaletre gant kresk ar priz rak gwerzhañ a c'hellont keroc'h c'hoazh dre ma kontrollont an darn vuiañ eus ar gwerzh e broioù ar c'hornog. Er c'hontrol e c'hell bezañ un afer mat rak gwanaet e c'hell bezañ ar re ha n'int ket izili eus o «c'hlub»...

Ma n'eo ket un afer fall ar c'hresk-mañ war ar prizioù evit ar Stadoù-Unanet peogwir o deus eoul war o ziriegezh, ez eo fall-tre avat evit Kornogeuropa ha Japan. En em ziorreet o deus kalz abaoe tregont vloaz ha war veur a dachenn armerzhel (ekonomikel) e lakaont zoken en arvar galloud dreist ar Stadoù-Unanet. Tentet e vezont ivez a vare da vare da ren ur politikerezh dieub er-maez eus an daou vloc'h bras. N'eus ket tireoul e Japan ha n'eus ket a-walc'h en Europa met pep tra er broioù-mañ a zo stag ouzh an tireoul. Gwanaet e vo eta o nerzh armerzhel ha ret e vo dezho bezañ sentusoc'h war an dachenn bolitikel... Makiavalek e seblant bezañ ar sojoù-mañ rak chalet eo ivez gouarnamant ar Stadoù-Unanet gant emdroadur politikel Japan ha Kornogeuropa, hag a zo kevridi dezho a-enep d'ar broioù komunour. Ret eo diwall rak un enkadenn re sirius hag a c'hellfe degas ar gomunourien er galloud e broioù 'zo...

Anat eo forzh penaos e teu an eoul da vezañ re ger hag e ranker kavout ur gremm (enerji) all da gemer e lec'h, ha n'eus nemet unan

hag a c'hell kemer e blas evit kenderc'hañ tredan marc'had-mat, ar gremm derc'hanel an hini eo.

Bro-C'hall n'eo ket bet ar vro diwezhañ da bleidiñ gant an derc'han. Gallaoued pe dud deuet da labourat e Bro-C'hall (evel Marie CURIE) o deus c'hoariet ur roll a bouez en araokadennoù ar skiant war an dachenn-se. Klasket en deus ar gouarnamant gall da vont war-raok war an hent-se evit abegoù soudardel ha politikel da gentañ, dreist-holl da vare De GAULLE. Gant he bombezenn ez ae Bro-C'hall e-barzh ur c'hlub bihan ma kaved ennañ ar Stadoù-Unanet, an Unvaniezh Soviedel ha Breizh-Veur ha deuet eo ennañ abaoe, Sina hag India. Ar c'hreizennoù a zo bet savet e Bro-C'hall etre 1959 ha 1971 evit kenderc'hiñ tredan (Chinon, Saint-Laurent-des-Eaux, Bugey) a rae gant un doare a-ziforc'h ijinet gant Gallaoued, an hentenn uraniom-grafit-aezhenn pe «hennenn c'hall». Adalek 1968 avat e voe savet ivez kreizennoù gant an doare amerikan dre «uraniom kreizennet», goude bezañ prenet breoù digant an Amerikaned. Evit meur a abeg, e voe divizet e 1970 dilezel an «hennenn c'hall» da vat...

Da heul kreskidigezh spontus priz an tireoul e dibenn 1973 e voe gwall nec'het ar gouarnamant gall ha pennfolliñ a reas. MESSMER, tevezeg (ministr kentañ) dindan ar prezidant POMPIDOU, a zisklerias d'ar 5 a viz Meurzh 1974 e vefe buanaet a-greiz-holl program-sevel kreizennoù nukleel e Bro-C'hall. Ret e oa kregiñ 16 chanter e 1974 e sell da lakaat 6 kreizenn nevez da vont en-dro bep vloaz adalek 1979.

Arguzennoù kaer ar gouarnamant gall a oa neuze :

- 1 - Frankiz Bro-C'hall e keñver an diavez (e keñver ar broioù o kenderc'hiñ tireoul)
- 2 - Priz izeloc'h an tredan a orin derc'hanel
- 3 - Fonnusted an uraniom

Ha sirius e oa an arguzennoù-mañ ?

Aes eo respont nann evit an arguzenn gentañ. Hervez ar breoù amerikan e vez savet ar c'hreizennoù-se. Ar c'halvezelouriezh (teknologiezh) a chom, dre vras, etre krabanoù ar Stadoù-Unanet. Ouzh-

n'eo ket kevredadoù gall hag a sav ar c'hreizennoù derc'hanel

penn-se met kevredadoù evel Framatome, stag ouzh EMPAIN-SCHNEIDER, un trust bras renet gant ar baron belgiat EMPAIN. Gwashoc'h a zo c'hoazh : ne gerzh ket ar c'hreizennoù gant uraniom eztennet eus kondon Bro-C'hall met ret eo degas an danvez-tan eus ar Stadoù-Unanet (n'eus evit ar mare labouradeg ebet gouest d'ober ur seurt danvez-tan en Europa). Dispi-gnet e vo eta kalz arc'hant en diavaez (evel ma vez graet evit an tireoul) hag emeur en arvar da vezañ berr gant an danvez-tan adalek 1980 rak emeur o sevel dredanvoù derc'hanel un tammig e pep lec'h met n'eus nemet ul labouradeg hag a c'hello pourchas danvez-tan dezho holl...

Kalz gwelloc'h e seblant din bezañ an eil arguzenn. Izeloc'h eo koust an tredan a orin derc'hanel eget hini an tredan graet dre leskiñ eoul. E miz Meurzh 1974 e kouste 1 000 Kilowatt-eur graet gant eoul 82 F (58 F evit an eoul) ha 1 000 kWh graet gant derc'han 45 F (7 F hepken evit an danvez-tan). Un dermienn a orin nukleel a gouste 0,038 F hag un dermienn graet dre leskiñ eoul 0,075 F. Splann e oa dija an diforc'h neuze. Gant ar c'hresk eus prizioù an eoul abaoe, e teu da vezañ kalz keroc'h c'hoazh ober tredan gant eoul eget gant an derc'han.

Talvoudus eo ivez an drede arguzenn. Daoust ma tizoloer, c'hoazh eoulvaezioù nevez bep vloaz dre ar bed, ez eo anat ne badint ket da viken. A-benn un nebeut degadoù e vo bet devet an holl direoul a gaver war ar voull-douar. Emañ bevezerezh ar bed o kreskiñ eus 8 % bep vloaz ha daougementet e vez eta bep 9 vloaz Anat eo e pigno muioc'h-mui ar prizioù...

Ar gweleadoù uraniom n'int ket war-nes mont da hesk, int, pell-a-se. Ret eo gouzout un dra eeun : un donenn uraniom hepken, implijet en un dredanva derc'hanel, a ro kement a c'hremm ha 13 000 tonnenn c'hlaou pe 86 000 tonnenn direoul losket en un dredanva klasel !

Ar gweleadoù uraniom anavezet hiziv dre ar bed a dalv dija e keñver gremm kement ha dek gwech, an holl eoulvaezioù anavezet ha bez eus moarvat kalz muioc'h da zizoleiñ c'hoazh rak an imbourc'h ne ra nemet kregiñ. Eztennet e vez uraniom e meur a

lec'h e Breizh, dreist-holl e Bro-Naoned, en-dro da Glizun met, hervez an arbennigourien (spesialisted), e vefe uraniom un tammig e pep lec'h en hor bro (an uraniom eztennet bep vloaz eus kondon Breizh a dalv kalz muioc'h eget an tredan, an tireoul hag ar glaou enporzhiet en hor bro, met ne zegas netra deomp nemet labour evit ur 400 mengleuzier bennak, rak eziporzhiet e vez an uraniom breizhat da greisteiz Bro-C'hall).

Un donenn uraniom a c'hellfe zoken talvezout kement hag ur milion a donennoù glaou dre implijout un dazloc'her gant neutronoù prim, un «dreistdredanva» (e galleg *surgénérateur*). Ne vestronier ket mat ar galvezelezh-mañ c'hoazh. Ar C'hallaoued a zo loc'h enno peogwir ez int aet kalz war-raok war an hent-mañ gant PHENIX met furoc'h eo moarvat ar broioù all hag o deus kavet gwelloc'h gortoz c'hoazh e vije bet graet araokadennoù nevez gant ar skiant araok sevel seurt dredanvaou.

Tud 'zo a gomz eus reiñ ul lañs nevez d'ar glaou hag a oa c'hoazh gantañ ar pouez brasañ en armerzh ar broioù diorreet hanterkant bloaz 'zo ; Chom a ra gweleadoù bras da gorvoiñ dre ar bed ha talvezout a reont kement ha pemp gwech pe marteze zoken dek gwech ar gweleadoù eoul anavezet. N'emaint ket en Europa siwazh, e Norzhamerika, en Unaniezh Soviedel hag e Sina ne lavarant ket...

Ret eo lavarout ur ger eus andonioù gremm all a vez kinniget a-wechoù evel un diskoulm evit tremen hep ar gremm derc'hanel :

- An dourdredanvaou war ar stêrioù : ne chom ket mui kalz plas evit lakaat re all nevez en Europa ha forzh penaos n'eus plas ebet e Breizh. N'eo ket ar fardelloù a vo savet war ar Winun pe war al Liger hag a c'hello kemer lec'h Chevire ha Kordemez.

- Ar mordredanvaou : anv a zo da sevel unan bras-tre e plegmor Menez Sant-Mikael (ar strollad komunour gall da skouer en deus en em ziskleriet a-du gant ar mennoz-mañ). Ne vefe ket ken spletus hag un dredan va derc'hanel siwazh ha kalz falloc'h e c'hellfe bezañ e heuliadennoù war an natur hag an endro.

- An dommder o tont eus ar c'hondon evel en Italia pe en Island. Talvoudus eo e broioù 'zo hag e lec'hioù 'zo. E Breizh n'eus ket kalz tra da ober siwazh war an dachenn-mañ.

- An avel : dister e vo ar gremm degaset gantañ e keñver ezhommoù gwirion an ijinerezhioù greantel.

- An heol : tu a vo da gaout dour klouar evit ezhommoù an dud ha da dommañ zoken tiez 'zo gant an heol met ne vo ket tu d'ober tredan da gas en-dro an holl ijinennioù hag ardivinkoù a reomp ganto. Kalz aesoc'h e vo maorvat stad an traoù e broioù all evel kreisteiz Bro-C'hall, Italia, Spagn ha broioù pelloc'h er c'hreisteiz. Evit kenderc'hañ kement a dredan ha Chevire gant an heol e vefe ret goleiñ gant melezhourioù un dachenn ken bras ha tachad kêrel an Naoned ! Gwir eo e chom c'hoazh kalz araokadennoù da ober moarvat war an hent-mañ. E Bro-C'hall ez eo bet lakaet 98 % eus dispignoù an imbourc'h evit gremm an derc'hanel ha 0,6 % hepken evit gremm an heol. Met ret e vo gortoz ugent pe dregont vloaz forzh penaos araok difourkañ war un diskoulm spletus ha, da c'hortoz, n'eus nemet ar gremm derc'hanel hag a c'hell degas un diskoulm d'hon diaesterioù, ma ne fell ket deomp dont da vezañ broioù isdiorreet, enno milionoù a dud dilabour...

Ret eo komz bremañ eus dañjer ar gremm derc'hanel. Gwelout a reer war an hent a gas d'ar Pirc'hirin enskrivadurioù niverus «ar Pirc'hirin = Hiroshima», h.a... Sot-pitilh eo ur seurt kêveriadenn ha diskouez a ra hepken ez eus tud a skriv forzh petra hag a varn an traoù hep gouzout eus petra ez eus kaoz. Un dredanva derc'hanel n'eo ket ur vombezenn. Evel-just ez eus ivez ennañ un dazloc'hidigezh hag a zo implijet dres da dommañ an dour a lakaio turbinennoù da dreiñ evel en un dredanva klasel met n'hell ket tarzhañ ha n'eus dañjer ebet evit an dud a chom e-kichen. Ret eo lavarout hag adlavarout an traoù anat-mañ. Lavarout ar c'hontrol a zo livañ gevier evit klask touellañ an dud ha spontañ anezho. N'eus dañjer ebet evit annezidi ar Pic'hirin nag evit Naonediz, hag an dredanva derc'hanel a c'hellfe bezañ lakaet e kreizkêr an Naoned, ne rafe ket muioc'h a zroug eget Kastell an Duged. N'hell ket tarzhañ un dredanva rak ma c'hoarvezje un dra bennak dic'hortoz en e ziabarzh ha ma ehanje ar gwikefreoù-yenaat a-greiz-holl ne c'hellje an dazloc'her nemet teuziñ ha paouez da vont en-dro, drezañ e-unan. Ar riskl nemetañ a zo evit an dud a labour

e-barzh, tost eus an dazloc'her, met gwarezet-mat e vezont bepred. Gwir eo ez eus bet tud gloazet pe zoken lazhet e gwallzarvoudoù e-diabarzh dredanvaou derc'hanel met ar gwallzarvoudoù-se n'o doa netra da welout peurliesañ gant an derc'hanel ha kalz niverusoc'h eo ar gwallzarvoudoù e labouradegoù all. Arabat disoñjal e varv siwazh ur bern labourerien bep vloaz da heul gwallzarvoudoù-labour. Kalz ize-loc'h eo ar riskloù en dredanvaou derc'hanel dre vras rak kalz strishoc'h eo ar reolennoù-surentez enno.

N'eus saotradur ebet o tont eus ar greizenn hec'h-unan nemet hini ar wrez rak adskuilhañ a ra an dredanvaou nukleel kementadoù bras a zour tomm. Kemmet e vo buhez ar pesked hag an houldi en-dro d'an dredanva ha ret e vo d'an natur kavout ur c'hempouez nevez. Implijet e vez ar stivelloù tomm en Island da dommañ an tiez ha da c'hounit legumaj, ha zoken gwini, er vro skornet-se. Ret e vo kavout an tu da implij an dour tomm-se e Breizh ivez d'ober traoù all, da skouer desevel ligistri ha givri-mor evel ar re a gaver er morioù tomm, gounit bananez hag orañjez e Bro-Raez h.a... Hep mar ebet e vez degaset kudennoù gant ar wrez met diskoulmet e c'hellont bezañ.

Ar gudenn wirion nemeti a sav gant ar c'hreizennoù derc'hanel, eo hini an dilerc'hiadennoù skinoberiant. Dinoaz a-walc'h eo dilerc'hiadennoù an dredanvaou klasel met dañjerus-tre eo dilerc'hiadennoù an dredanvaou derc'hanel evit yec'hed mabden ha buhez an natur. Ha dañjerus int evit pell amzer rak, da skouer, ar plutoniom ne goll an hanter eus e skinoberezh nemet goude 25 000 vloaz ! Ret eo dastum an danvezioù-se ha kas anezho betek ul labouradeg e lec'h ma vezont kreizennet, lakaet e stumm pavezioù, goloet goude gant gwer teuzet ha renket e kreñvlec'hioù e bet oñs pe e traoñ mengleuzioù-holen (rak sec'h-kenañ eo bepred ar mengleuzioù-se ha n'eus riskl ebet a qontammadur enno).

Dañjer a zo e-pad ar veaj eus an dredanva betek al labouradeg, da skouer eus ar Pirc'hirin betek Cherbourg. Pa vo ur bern dredanvaou derc'hanel e vo ivez ur bern kirri-samm bemdez war an hentoù gant o c'hargoù skinoberiant hag ur gwallzarvoud a c'hello bepred c'hoarvezout. Torfedourien pe dud kollet o skiant ganto a c'hello ivez laerezh an danvezioù dañjerus-se

evit drouktunañ tud all pe ar gouarnamant... Arabat disonjal hon eus ivez mirlec'hioù-aezhenn bras e-kreiz hor c'hêrioù, hag a vefe aes da lakaat da darzhañ. Aes e vefe ivez lazhañ miliadoù a dud dre gontammiñ an dour er c'hêrioù bras. Gwelet ez eus bet torfedou-rien o lakaat da darzhañ kirri-nij, abaoe un nebeut bloavezhioù. Tud foll a c'hell ober droug e meur a zoare dija. Anat eo e vo ret kaout kalz gwarded en-dro d'an dredan-vaou ha d'ar c'hirri-samm o vont war an hentoù, ha kement-mañ a gousto ker ha ne vo ket gwall-blijus evel-just.

Mat eo komz eus an dilerc'hiadennoù skinoberiant hiziv met disonjal a reer an holl zanvezioù dañjerus all a vez skignet hiziv c'hoazh en natur, evel da skouer ar sianur skuilhet bemdez kementadoù bras anezhañ el Liger gant meur a labouradeg eus an Naoned hag eus Sant-Nazer. Se ne vir ket ouzhimp da zebriñ istr eus Mesker pe eus Bourc'h-Nevez...

Pezh a gavan chalus dreist-holl en afer-mañ eo lezel an dilerc'hiadennoù-se war hol lerc'h evit miliadoù ha miliadoù a vloavezhioù. A-benn 10 000 vloaz e vo ret d'hon diskennidi kenderc'hel d'ober war-dro hon dilerc'hiadennoù derc'hanel ma n'eo ket kavet un diskoulm skiantel bennak evit o diskar a-benn neuze. Amañ ez eo splann n'eo ket mui ur gudenn armerzhel rik met ur gudenn bolitikel ivez. N'heller ket mui komz hepken gant sifroù. Kefridi ar renerien bolitikel a zo ober dibaboù evit an amzer da zont. An dilerc'hiadennoù skinoberiant a bado pell amzer met a gemero ivez kalz plas. Er bloavezh 2000 e vo ezhomm da nebeutañ eus 80 km² war ar voull-douar evit o lakaat. A-benn nebeut e teuint da vezañ ur gudenn diziskoulm. Un diskoulm a zo e gwirionez met unan koustus-meurbet : kas an dilerc'hiadennoù e-barzh ur fuzeenn war-du an heol. Ur vombezenn derc'hanel o tarzhañ dalc'hmat eo an heol ha ne raio droug ebet dezhañ eta degemer un

nebeut traoùigoù ouzhpenn.

N'eo ket aes kudenn ar c'hreizennoù derc'hanel ha diaesoc'h eo c'hoazh e Breizh peogwir n'omp ket mistri war hor bro. N'eo ket savet dredanvaou bras Chevre ha Korde-vez evit mad ar Vretoned met peogwir e oa tu da zegemer listri bras en aber al Liger hag e oa spletus kenderc'hiñ tredan eno evit Breizh ha kornog Bro-C'hall. Ma vez savet ur greizenn derc'hanel e Bro-Naoned hag unan all e Penn-ar-Bed, e vo dreist-holl evit bastañ da ezhommoù an armerzh gall. Ur fazi a vefe nac'h anezho da vat koulskoude rak ezhomm a zo eus seurt andonioù-gremm bras evit dedennañ labouradegoù nevez ha krouiñ implijoù evit ar Vretoned. Ur fazi ken bras a vefe kontañ war ar c'hreizennoù derc'hanel hepken evel m'en deus graet ar gouarnamant gall, e-pad ur pennad da nebeutañ. Ret eo klask doareoù all evit an amzer da zont. Met splann eo ne vo ket tu da dremen hepto en Europa, e-pad ur pennad da vihanañ.

Ernest MENARD

PERAK EMAON O TESKIN BREZHONEG ?

*Perak emañ o teskiñ brezhon-
neg ? Setu ur goulenn ken diaes ha
n'eo talvoudus.*

*Diaes deskiñ brezhon-
neg ? Ya, sur. Met ma ne vije ket plijus deskiñ
anezhañ pell 'zo e vije echu gantañ,
da lavarout eo, e vije bet ankouna-
c'haet ar c'hoant-se. Sur, plijus eo
deskiñ brezhon-
neg. Ar poizioù karget
a ehvorioù, ar gerioù klevet pell 'zo
hag adkavet, ha pezh a zo
pouezusoc'h ur spered ispisial e
stumm ar frazennoù, en anaoude-
gezh an traoù 'zo d'ober araok
bezañ klevet un urzh pe ur goulenn.
Se 'zo tennoc'h da zeskiñ ha
talvoudus ivez.*

*Plijus eo deskiñ brezhon-
neg. Ma
setu un abeg ha n'eo ket a-walc'h,
d'am soñj, evit ober ar strivadenn
ret a-benn gouzout ar yezh. Kalz
abegoù politikel zo bet roet. Difenn
ar vro, spered ar vro, al labourerien
a-enep ar c'hapitalism, difenn ar
c'hultur poblek, hon droed da sevel
HON dazont. Ya, 'veljust, bez ez
eus traoù mat en holl abegoù-se.
Anat eo, seul falloc'h e vo stad ar
yezh, seul falloc'h e vo hor stad.
Met an dra-se n'eo ket lavarout
omp staget ouzh ar brezhon-
neg. Ar
c'hontrol an hini eo. Ar brezhon-
neg*

*n'eo nemet ur benveg, brav ha
plijus ; gwell a se evidomp, met ur
benveg evel ar c'hultur en e bezh,
da vezañ ha goude da vezañ.*

*Da vezañ, n'eo deus ket mui
ezhomm ar Vretoned eus o yezh. Ar
brezhon-
neg n'eo ket ken ur benveg
evit an darn vrasañ eus hor pobl. Un
dra gaer eo, da lakaat en ur mirdi
bennak, ha memes, ma advefve un
tammig ne befe ket fall tamm ebet,
met petra fell deoc'h «on ne fait pas
d'omelette sans casser des œufs».
Ne oar ket tud ar rummad «treme-
net» n'eo deus ket savet o bugale e
brezhon-
neg. Pa vez goulennet ouzh
un den 50 vloaz perak e komz e
bugale ar galleg, e responto : «Ma,
n'ouzon ket, ni a grede e oa mat
ober gant ar galleg, e oa mat evit
hor bugale, ha forzh penaos ar gwir
a oa ganeomp : an arc'hant a gomz
galleg».*

*Perak 'ta emañ o teskiñ
brezhon-
neg ? Gwelloc'h vefe din
lenn «moto-revue» ha labourat un
tammig pelloc'h war va matemati-
kou. Da gentañ, me soñj Breizh evel
m'emañ ne bado ket pell. Emañ
Breizh etre div dra : ar vroadelezh
gant he c'hultur poblek hag ar bed
kapitalour gant e gultur didalvoud*

*ha gwaskus. Ret e vo dibab pe vo
dibabet evidomp. Neuze, gwelloc'h
vefe dibab diouzhtu.*

*Dibabet em eus : me va-unan.
Me gav gwelloc'h bezañ un den trist
evit ur vergodenn laouen ; ya, pa
lavarant em eus dibabet, e gwirionez
n'eo ket gwall bouezus. Me 'm eus
dibabet an dra-se, te 'teus kavet
gwelloc'h un dra all, ha pep hini war
e varc'h... Met setu, un dra a
c'hoarvez, a vo gwiroc'h-gwirañ : ar
Vretoned a zo heuet, (n'ouzon ket
penaos emañ kont er broioù all),
heuet gant ar vuhez emaint o ren.
Niver ar re n'eo deus netra da goll a
gresk bemdez. Ha neuze e kresko
ivez niver ar re a welo ar brezhon-
neg evel ur benveg mat evit adkavout ur
stad den ha n'eo ket ur «citoyen de
la démocratie avancée» (brein a
felle dezhañ lavarout) !*

*Me a zesk brezhon-
neg evidon-
me da gentañ, me fell din anañ un
aer nevez... Ha d'an eil, evit holl
vugale Breizh da zont : re anavezet
eo ganin ar pezh a vez galleg e
galleg : «bezan etre div gador».*

AR MOGN
Studier e Roazhon

Pempkantvet deiz-ha-bloaz Anna Vreizh

Ganet eo Anna Vreizh d'ar 25 a viz Genver 1477 e Kastell an Duged e kêr an Naoned hag abaoe meur a vizvezh e vez komzet kalz eus an deiz-ha-bloaz-mañ e kêr vrasañ Breizh. Ne vo ket lidet war an ton bras avat evel ma voe lidet e 1932 pevarc'hantvet deiz-ha-bloaz ar feur emglev a stage Breizh ouzh Bro-C'hall. D'ar mare-se en doa graet ar prezidant gall div veaj da Vreizh a-ratozh-kaer evit lidañ ar bloaziad-se. E 1532 e oa kouezhet Breizh evel ur frouezhenn azv e krabanou Bro-C'hall.

Disheñvel-krenn e oa an traoù e 1477. Ur vro dieub e oa Breizh c'hoazh, e barr he bleuñvidigezh. Ar pemp Dug diwezhañ a renas war ur vro a oa o tilezel ar grenn-amzer : Yann V (1399-1442), Frañsez I (1442-1450), Per II (1450-1457), Arzhur III (1457-1458) ha Frañsez II (1458-1488). Krouet e voe ur skol-veur en Naoned e 1460. E 1485 e voe diazezet ur gwir parlamant breizhat. An ijinerezhioù a bep seurt hag ar c'henwerzh a yae war-raok gant skoazell ur verdeadurezh a oa

e-touez ar re oberiantañ en Europa. An Duged a skoulme emglevioù gant broioù all : Bro-Saoz, kêrioù an Hansa (hanternoz Alamagn), Portugal, Danmark, Biskaya, h.a. Ar C'hallaoued int, a oa estrenien hag enebourien. Anna ne oa nemet dek vloaz pa voe sezizet kêr an Naoned gant an armeoù gall, eus an 19 a viz Mezheven betek ar 6 a viz Eost 1487. Hag ar bloaz war-lerc'h, d'an 28 a viz Gouere 1488, e voe trec'het armeoù Breizh e Sant-Albin-an-Hiliber ha 10 000 Breizhad a varvas eno evit frankiz o bro. E 1491 e voe aloubet adarre hor bro en he fezh gant an armeoù gall ha rediet e voe Anna da zimeziñ gant ar roue gall. Arabat komz eta eus ur romant a garantez ha n'eo ket souezhus e vefe bet divizet gant an aotrouniezhioù chom hep brudañ re an deiz-ha-bloaz-mañ.

Setu perak moarvat en deus ar gouarnamant gall nac'het groñs da embann un timbr-post evit deiz-ha-bloaz Anna Vreizh tra ma vo embannet ur bern timbroù e 1977, en o zouez meur a hini evit tud pe

darvoudoù kalz disteroc'h. Fall e vefe moarvat degas da soñj^{an} dud e voe ganet Anna Vreizh e kêr an Naoned, peogwir e tispieg mat ar bruderezh ofisiel n'emañ ket Bro-Naoned e Breizh (pa gomzer eus an amzer dremenet ez eus anv hepken eus istor «kontelezh an Naoned» !!) Setu perak ivez n'he deus roet kêr an Naoned nemet ur skoazell-ar-c'hant 50 000 F d'ar c'homite a ra war-dro an deiz-ha-bloaz tra m'he deus roet ouzhpenn 300 000 F evit gouelioù etrevroadel ar bleunioù a vo dalc'het e Bro-Naoned eus an 12 d'an 23 a viz Mae 1977 ! Setu perak ne vo ket komzet kalz kennebeut eus Anna Vreizh e skolioù hor bro, er skingomz, er skinwel nag er c'helaouennoù. Diseblant e chomo an darn vrasañ eus hor c'henvroiz peogwir e vez kuzhet outo istor o fobl.

Kriz e voe buhez Anna Vreizh. Koll a reas he zad pa oa 11 vloaz ha p'edo he bro o paouez bezañ trec'het gant armeoù an estren. Daoust dezhi bezañ yaouank-tre, en em zerc'hel a reas abred-tre evel ur rener-Stad gwirion. Dre dredeog e timezas e 1490 gant an Impalaer Maksimilian a Aostria met torret e voe an dimeziñ-mañ ar bloaz-war-lerc'h ha rediet e voe neuze da zimeziñ gant ar roue gall Charlez VIII, pa oa kouezhet an Naoned, Roazhon hag an holl greñvlec'hioù a-bouez e krabanou ar C'hallaoued. En em aberzhiñ a rae evit he fobl. Kerkent ha ma varvas he fried e 1498, daoust ma oa rediet da zimeziñ gant ar roue gall da heul gant ma vefe dizimez hemañ, e teuas en-dro da Vreizh. Pa zimezas gant Loeiz-XII e 1499 e lakaas hemañ da asantiñ d'ur feur-emglev

1477
1977



ANNÉE
ANNE DE
BRETAGNE

NANTES NANTES NANTES

skeudennoùigoù embannet gant Ti an Douristed

a roe de Vreizh he frankiz en-dro. Dont a reas en-dro da Vreizh meur a wech e 1505, 1507 ha 1509 ha mervel a reas d'an 9 a viz Genver 1514. Sebeliet e voe he c'horf en iliz Sant-Denez e-kichen Pariz met degaset e voe he c'halon en-dro da Vreizh, d'he c'hêr c'henidik, hervez he c'hoant...

Fromus eo lenn danevell he buhez. Savet ez eus bet meur a levr e galleg diwar-benn Anna Vreizh ha nevez 'zo c'hoazh unan (dister a-walc'h) gant Michel de MAUNY hag unan (talvoudsoc'h d'am soñj) gant Herve Le BOTERF. N'eus bet savet levr ebet c'hoazh e brezhoneg siwazh war an amzer-se eus istor hor bro ha mall 'zo warnomp holl da lenn **Istor Breizh** La BORDERIE pa voe erruet Roparz HEMON da vare Anna Vreizh en e droidigezh ken pouezus... Ret evo da bep hini mont ivez da welout an diskouezadeg a zo bet aozet e Kastell an Duged evit deiz-ha-bloaz Anna Vreizh. N'eo ket unan vras-tre rak derc'hel a ra e div salig hepken met diskouezet e vez enni dielloù prizius-meurbet na c'heller gwelout morse e lec'h all, evel da skouer :

- Lizher ar Pab Sixtus-IV oc'h aotren sujidi an Dug Frañsez-II da genwerzhañ gant an Durked (21 Meurzh 1480).

- Lizher an Dug Frañsez-II da Vaksimilian Aostria evit prometiñ dezhañ e verc'h da bried (23 a viz Gwengolo 1487)

- Lizher Anna Vreizh d'an Naonediz (22 a viz Du 1498)

- Lizher-aotren an Dug Yann-V (3 a viz Gouere 1439)

- Lizher an Dug Frañsez-II d'an Naonediz

- Lizher-aotren an Dug Per-II (4 a viz Du 1455)

- Lizher ar Pab Pius-II o krouiñ Skol-Veur an Naoned (4 a viz Ebrel 1460)

- Lizher an Dug Frañsez-II d'an Naonediz evit pediñ anezho da gas dileuridi d'ar c'huzul-meur edo war-nes bodañ e Redon evit divizout war an doareoù da stourm ouzh an argadeg edo ar roue gall o prientiñ a-enep da Vreizh

- Lizher-emglev etre Frañsez-II ha Charlez Her, Dug Bourgondia

- Lizher Ladislas, Roue Hungaria ha Bohemia d'ar Rouanez Anna (24 a viz Du 1500).

... hag all...



Anna Vreizh war-dro 1505, tresadenn gant Jean BOURDICHON
Leningrad, Mirdi an Ermitaj

Diskouezet e vez ivez levrioù kozh evel da skouer levr-pedennoù Anna Vreizh (1497), armoù eus hec'h amzer, poltredoù, delwennoù (mouladurioù eus delwennoù Loeiz-XII hag Anna Vreizh e Sant-Denez, mouladurioù eus delwennoù Frañsez-II hag e wreg Marc'harid Foix en Iliz-Veur an Naoned.) Gwelout a reer ivez an arc'hig-aour e lec'h ma voe lakaet kalon Anna Vreizh goude he marv (degaset eo bet a-ratozh-kaer eus ar

Mirdi Dobrée ha ret eo bet dispign 20 000 F evit aozañ evitañ un armel-houarn ispis ial hag e ziwall noz ha deiz...).

Digoret eo bet an diskouezadeg-mañ d'an 20 a viz Kerzu ha padout a raio betek ar 4 a viz Ebrel 1977. Digor eo bemdez, nemet ar meurzh, eus 10 da 12 eur ha eus 14 da 18 eur. Priz an tiked : 1 F. N'eus netra da baeañ d'ar sadorn ha d'ar sul.

Geneviève BRETECHE

TAOLIOU-KAER LUCKY LUKE EVIT AR WECH KENTAN E BREZHONEG

NEVEZ DEUT ER-MAEZ

MA DALTON



E GWERZH EN HOLL LEVRDIOU A-ZOARE

EMBANNET GANT SKOL AN EMSAV B.P. 1 22270 PLIJIDI